

Reformet er blavez 1857,

33. EN HENOR D'AN ITRON VARIA DEUS AR GOZ-YEAUDET.

Voar ton : Noël, Pastoret.

M'ho suppli, Crouer souveren,
Accordet din ho sclerigen,
Vit composi eur Wers neve
Da henori Princes an Ee.

Ma désir, er memeus amzer,
A zeo celebri, ber a ber,
Eun andret special er vro
Renommet dre he miraclo.

Me gomzo deus eur plaç' santel
Zo situet en traou Léguer,
Consacret d'ar Werc'hez Vari,
Quenta ilis savet dezi.

Hep choqui na laret guevier,
Bars an coz escopti Treguer
Ema an templ ancienna
Gret da Vam Salver ar bed-ma.

Er bla daouzec ha triguent
Goude maro roue ar sent
A se batisset ar Yeandet,
En henor d'he vam beniguet.

Disquib Joseph Arimathi
Oe quenta escop Lexobi :
Disquen a res en Breis-Izel,
Dre avis eur mignon santel.

Goude beza bet tremenet
Dre Vro-Saoz pe Breiz meur hanvet,
En Montroulez a disquennas,
Ha ker oll a gontvertissas.

An den divin ze Drenalus
A operas, dre c'hraç, Jesus,
Ar gonversion burzudus-ze,
Hac a blantas éno ar fe.

C'hoas a rés batissa en ker
Da sant Jacques eun ilis caër
Hac en ru ar feunteun ouspen
A res sevei Croas ar Letern.

Lexobihen elevas neuze
O prezegui lezen Doue,
Graç an Ee, dre he sermonio,
A douche an oil galono.

Goude beza convertisset
Habitantet ar Goz-Yeaudet,
A n'em occup, hep coll amzer,
D'ober construi ilis ker.

Gant joa da escop an Naonet
Pihini oa sant Cler-hanvet
A annonç freus he labourio
Bars an faveur an inco.

Sant Lin, Pontif universel
D'ar c'houl-ze er Guer Eternel,
A voe ravisset o clevet
A voa Drenalus er Yeaudet.

Ar guir Doue a revele
D'an tri den santel-ma bemde
Prezegui d'ar bopl he lezen
Hac ar religion g'hristen.

En Rom neuse oa Vitellus
Impalaër ; meurbet furius,
A ré massacri, hep true,
Ar Ghristenien a bep contre.

Goude, var an trôn a bignas
Eun Impaler vertuzus bras ;
Constantin a oa he hano,
Protector doctrin hon Autro.

Cador Sant Per varlerc'h Sant Lin
Oe occupet, de c'hraç divin,
Gant Melchidias, den santel,
Choazet dre urz an Eternel.

Henes a névoa consacret
Gunaël escop er Yeaudet,
Ha henvel, a res cathedral
Ilis ker d'an esquibien all.

Ar prelat-ma, leun a souci
Deus a inco Lexobi,
A nevens prestic ordrenet
Consumi an oll idolet.

C'hoas a res cavet en pep ty
Eun imaj deus ar Crucifi,
Re Vari hac an Ebestel,
Ha cals a bortejo santel,

Nombr a esquibien a neus bet
Conduet pobl ar Goz-Yeaudet :
Daouzec escop ha triguent,
Herve rapport buez ar sent.

Sant Tual ive gant henor
Pell bras zo bet éno pastor :
Cals a sent a gonter ouspen,
Sant Docmet ha sant Ruellen.

C'hoec'h vla ha triguent eo bet
Sant Tual escop er Yeaudet ;
Eno eo marvet, a lerer :
Darn a lavar, en Landreguer.

Nebeudic goude he varo,
Dre ma ré leun a viraclo,
He relego so bet savet,
Ha gant eur soign bras conservet.

Lexobi,
vra ha triguent, vandro,
chomas da prelat eno.

habitantet courajus,
eus ar guer-ze, dre c'hraç Jesus,
Nao mis creun a neus repousset
Pevar mil a ennemiet.

Ar re-ma a oa Danoact
Tout gant Hasterin conduit
Var listri betec Lexobi,
Vit essa hec'h assieji.

Ar chef barbar-ma o velet
Dorojo ker outan serret
Hep moyen da antren enni
A conclu donet d'he dévi.

Bars ar fin an habitantet,
Dre eun danger patant presset,
A n'em rent, hep dout o sonjal
Obten eun tretament leal.

Mez ven a oe ho esperans,
Rac nenze soudan a commans
Ar massacr var ar g'hristenien,
Dre urs an tyrant inhumen.

Ar pillaj a oe general :
Tout met relego sant Tual
A oe savet an tresorio,
Hep respecti an iliso.

Er bla eiz cant c'hoec'h ha tregont,
Sauf da n'em drompa var ma c'hont,
A oe rezet ker Lexobi,
Ha na chomas sort anezi.

Ar relego precius-ze
Da Chartr oe transportet neuse,
Gant an escop fur Caramus,
Dre eur bonheur miraculus.

Prestic goude an distruj-ze,
Deus a Dol a deu eun arme,
Vit chasseal ar barbare;
Re divezat int n'em gavet.

Caranus soudan a varvas
En Franç, ha neuse, a chomas
Vacant siej ar Goz-Yeaudet,
Hac an denved oll desolet.

An prinç Momen, rone en Dol,
Pa vel an dioces o coll,
A hanv Gratien da escop
En Treguer, vit gouarn ar bopl.

Ar prelat neve a c'houlén
Permission digant Momen
Da chanç a blaç d'an escopti,
Pa zeo distrujet Lexobi

He vennat a neus obtenet,
Neuze eo n'em etablisset
En eur gouent hanvet Treor,
Batisset var bordic ar mor.

Bars an andret-ze a commans,
Herve an histoar, hep doutans,
Ar guer demeus a Landreguer :
Quement-ze a zo merquet scler

An templ santel er Goz-Yeaudet,
Eun nebeut oe abandonnet;
Mez, dre c'hraç ar Mestr Souveren,
Na oe quet dilest vit biquen.

Rac, dre guir inspiration,
A oe gret ar construction
Demeus eun all en Lexobi,
Consacret d'ar Werc'hez Vari.

Ar Vretonet zo dleourien
D'an escop oa neuse o ren
Demeus ar chapel precius
Renouvelet da Vam Jesus.

Eno medi ar guir sourcen :
Ha na disec'ho birviquen,
Eur chàn abundant a c'hraço
Vit ar c'horf hac an ineo.

Me na citan miracl ebet
Gret dre Werc'hez ar Goz-Yeaudet :
D'ho rapporti ha d'ho scriwa
Eur mis antier na ve netra.

En he chapel a zo remed,
A dra sùr, vit pep sort clenved,
Vit pep anvoui ha pep danger :
Pep peden vad a exaucer.

Mar to Doue d'ar c'horf yec'het
Dre c'hraç Itron ar Goz-Yeaudet,
A soulaj c'hoas an ineo ;
Effaci ra ar pec'hejo.

Induljanço perpetuel
Zo accordet d'ar plaç santel
A behini dec'h a comzer,
Ha d'ho gonit zo fors amzer.

Var ar poënt-ze ar Goz-Yeaudet
A zo meurbet avantaget ;
Hed mis mai a pad ar pardon :
Deomp d'y gant guir devotion.

Ploulec'h, pa zo var ho douar
Eun andret quer dign a vemoar,
Bet bepret fidel da Vari,
Patrones o-coz escopti.

Vit meritout he faveurio,
Imitomp oll he vertuio,
Ma vefomp ganti curunet
Eun de en Palez an Drindet !

FIN.